

Dastumad Pennwern : dornskrid 90

101. CHARLEZ VINOÙ

( follennoù 36-38 )

Sillaouet hag e kleffot, hag e kleffot kana  
eur son a zo kompozet a neve er bla man.

A zo gret da Charlez Vinou a zo lesanvet Kojou  
A zo ed da barez irvoan eun neubeudik amzer zo.

Eun devez gant konjez e vest eo bet ed d'eur linadek,  
Kavet daou pe tri all gantan da ranvad e voant laket

Kojou, dre ma voa badin e deus pariet oute  
en divije bob a bok dingant pepini a ne.

Oll ma harient<sup>o</sup> gant-han, nikun en deus refuzet (1)  
Nemet ounont merc'h ar Meliner : onez biken ne roje

- Possub e-ta, melinerez a deufez d'am refusi  
A te houd certenamant on prest da honid ma fari.

Evidoc'h da vea melinerez ne doc'h ket a kalite  
ar re al tout o deuz roet a c'houi a rofo ive.

Mond Kojou a lamet gati a freza e davancher  
Ag hi a sevel ac'hane a mond fachet bras dar ger.

Pa erruas er ger voa e breur gant e labour  
hag hi e hober fos klemou  
De breur dimeus a Kojou.

Kement a eure a klemmou de vreur dimeus a Kojou  
er fin a brometas dezi e lamfe e vue digantan.

En distro deus al linadek e bed attaket gantan  
hag e vue sertenamant neket lamet digantan.

Antronoz vintin pa savas e bed ed da Lannion  
Da lakat e neum voada a refreski e galon.

-----  
(1) harient : kompren : parient

An distro deus ahane e bed attaket gantan  
hag e vuez sertenamant a zo lamet digantan

En tre kroas sant ar valanek ag ive ar velin neve  
e klevet ar por kez Kojou e krial fors e vue.

Señt a balamour da petra e rank kojou kol e vue  
Divar bea poked deur plac'h iaouank ebars en un assemble

- Entre o divrec'h gwir mam Doue me rekomand va ene.

Na pa ia ar velinerez dar sul dar pardonniou  
e lavar ar potret iaouank an eil de guile ane :

- List ar plac'h se da passeal pe e kolimp or bue.

-----  
vvvvvvvvvvvv

Jannton Charlès, 10 févr. 1851

-----  
vvvvvvvvvvvvvvvvvvvv